

*Koneri (1.)*

## KLEIER SANT KONERI

DA DOM ERWAN AR ROLLAND

PERSON PLOUVOUSKAN

Pa dave mik ar goajo war roc'hello Loaven,  
Pa guze ann heol er mor, tro-dro néb koumoulen,  
Nag a véach sant Tual a dridaz hé galon,  
O klevet diouz Landréger kloc'h Koneri o zon.

Kaer en doa ziuaz ! laket he gloc'h braz war vranskel  
A bell-zo na glevaz mu kloc'h hé *ginderv* (1) zantel :  
Koneri 'nn hé chapélik, gant-han kalz a c'hlae'har,  
Ré dister mouez hé gleier a chomme dilavar,

Barz ar reier gwaz ha biskoaz,  
Iudet, avel ! trouzet, mor braz !

Kaer ho po skisan ar goajo,  
Klec'hiKoneri ho mougo.

Pell en tu-all d'ar Seiz-Enez,  
Pell pell en tu-all da Landréger,

A glevo bep-unan ho mouez,  
Mouez sant Koneri, mouez hé gleier.

---

(1) Hervé ma lavar eur ganouen goz, a oa kindirvi S. Tual  
ha S. Koneri.

Hag enn hé Iliz-veur Tual,  
Dreist da gleier skeltruz bourg Priel,  
A glevo c'hoaz ével gwéhall  
Kloc'h Koneri, hé vignon zantel.

Ha breman a-zevri  
Kanet, kloc'h Koneri,  
Da Eskob San-Briek  
Ho son ar muan c'houek.

Da Vreur Tual Tréger,  
Eur son, eur son zéder :  
Kanet d'éan ivé  
Eur son a drugaré :

A-bell eo dirédet,  
Gant-han hoc'h badéet,  
Kanet héb eanan :  
Bennoz Doué d'éan !

Bennoz ann Env hag ann douar,  
Bennoz Koneri da néb hen kar ;  
Bennoz da Blouvouskan bepred,  
Gwell 'vit Plouvouskan na vé kavet.

Ker pell ha korsen Landréger  
A vo gwélet hé dour gwen enn er,  
Na par d'he iliz na vézo  
Mu en Tréger évid en Goélo.

Kentoc'h gand éon ar mor a frailfé ar gérek,  
Kent 'vit na lakfenn hirié eur gir gaou enn em bég,  
Me a diskuillo éta, ma eo ret hen diskuil,  
Eunn den hag en euz hadet obéro mad a-buil.

Didrouz en deuz labouret en tachenn ann Iliz,  
Rag na glask német Doué d'hen péan pa vo skuiz.  
Ar c'hreunen éd enn ero a zav didrouz ivé,  
Ha gwell évid hé hini freuzen-all na zavfé.

Gwir eo éneb ar c'hreunen a stourmo gwal amzer,  
Glaog hag avel, ha grizil, ha gwééh ré a domder ;  
Kaer a-vad ho do c'hoari, gant bennoz ann Envo  
Dizéblant ar c'hreunen éd er park a daréo.

A-uz d'ar mor kounaruz ma sévez ken kempenn,  
Ma sévez, ilizik koant, n'eo ket 'néz poan war-benn,  
N'eo ket 'nez poan ha trubuil, mès ar bâr tréménet,  
War-n-hoc'h, *Person kalonek*, a darz heol binniget.

Nag a wééh dirag Doue hoc'h euz renket goélan,  
Nag a wééh hoc'h euz pédet Sent ho pro d'ho nerzan,  
Hag Erwan, ha Koneri, Anna ha Tudual  
Ho deuz bét d'ac'h ho mennad... Chétu 'nn dé da dridal

Eunn dé mar bé ankouéet gand ann dud hoc'h hano,  
Ar veien kouls hag ar c'hleier, Otro, ho tiskuillo,  
Ha d'ann oll a laroint : « *Aman ! oa eur Person,*  
*Eunn den a doujanz Doué ha nerz enn hé galon !* »

C'hoaz eur zon, ar chaeran zon,

Mar zo hini,

C'hoaz eur zon, kloc'h Koneri,

D'ez Person!

C'hoaz eur zon, eur zon skeltruz,

Da bep hini!

Ra véfomb 'vel Koneri

Evuruz!

#### KURE TRAUGERI.

Plouvoukan, er 2 a viz gwengolo, 1877.



---

Landreger, — E ti AR FLEM, Mouler-Levrer.